

(f. 65)

Fantik koant.

Debonjour Fantik koant
^{a pebeus}
~~Darman~~ eur chenchamant.
 Divea ma o kouelis
 E vaa fresq o c'hinnvis
 A basue me a kred
 no c'heus^{hi} choui ked chenchet.

Joa vras e meus ouzoc'h
 A c'hoas am be muioc'h
 Ma viche ho kenet
 Eun neubeud dekoret
 Dees an (1) netadures
 Pardonnit va mestres

Kontet din Fantik koant
 Doare ho tiegerz
 Paourentes zo kallet
 Mes nag deo ket pec'het.
 Levirit din eb don
 hag e vanke dec'h saon.

(f. 66)

Otro ey ti va mam
 nen kaffen ked eun tam
 Nag arc'hant da prena
 An dra-ze ar goassa.
 Dre se me nen don ket
 Da veza tamalet.

Ne meus ket pem goenek
 Da kaout eun tam blonek
 Nag ive d' ober tan
 Nemet eur kargik Lan

(1). - Le ms. a : "va" et non "an".

48

Otro bea zo em zi
 Diou pe teir skudel pri.

Teir loa hag eur podes
 eur podik da klasq lez
 eur bank hag eur goele
 eur skaon eun tabore
 Pidik d'ober (1) krampoës,
 mes non pas alliez.

Bes a meus c'hoas oupen
 trebes a chadouren
 hag eur kramailloren
 bez a meus kribinou mad
 Pa meus lin da kribat.

Daou kar evit nea
 Traouill da zibuna,
 Touer (2) da oza bleud
 Pa vez gwerrzet an neud

(f° 67)

Leverit din Fantik koant
 A c'houi a ve kontant
 Da kaout eur plijadur
 eur bonheur dreist muzur
 Da zonnnet da orni
 Gant ho kenet va zi.

Otrou ne zifferan tam
 Ma ves kontant va mam.
 Er memeus bolonte
 Dem on Daou he vete (3)
 Va c'halon chagrinet
 Da veza refuset.

— Debonjour greg eurus
 Greg fur a vertuzus

(1). - Le ms. a : obes . (2). - Lire : louer. l est barré à tort dans le ms.
 (3). - D'abord : e bete ; "he" est écrit en surcharge sur "e" (~~he~~) ; le v
 est écrit en surcharge sur le b (de bete).

Me zo deud d'ober ar goulen
 demeus eur fumelen,
 Demeus eur fumelen goant
 A plich d'am santimant.

(f° 68)

Otrou ne kredan ket
 E vec'h n'em humiliet
 Da zont d'ober ar goulen
 Demeus eur fumelen
 A beb dra dibourve
 Excepte da burete.

Sellit en eur c'hastel
 Ma chom eun dimezel.
 Sellit a beb coste
 Neus nemet paourente
 Kapab do distrei
 A beb seurt fantasi.

. Me zo eur marc'hadour iaouank
 A meus aour hag arc'hant.
 eun dimeurik charmant
 Prest d'ho digemeret
 D'an eur ma dizirfet

Ar son man a ziskoel
 en ker a var ar mes
 Ar merc'hed a so poset
 a Plich kals d'ar oazet.
 Rag se merc'hed va bro
 Bezit modest ato.

7

Jannet Kéguiduff 23 x^{bre} - 50.